







Ar <sup>59</sup>c'hoz den Yaouank

56

All.<sup>o</sup> Mod.<sup>o</sup>



Gwechall ar merc'hed yaouank a glaske labourat  
Kanna, gwienna rochedo ober stam ha griat  
Mez ar re a zo breman E zo klask beza koant  
Setu aze vit perag on chomet den yaouank

3<sup>o</sup> C.

Vel ma int bed pell er skol distket deus ar galleg  
Kaozeal, lenn ha skriva evel advokaded

Da labourat a gredan hini ne n'an euz e'hoant  
Setu aze vit perag on chomet den yaouank

4<sup>o</sup> C.

Gwelloc'h eo eur vatez hag a zervichou mat  
Vit n'an e' eun dimizel pa n'oar ket labourat  
Ne vo ket pell o tigass eur mil lur da bemp-kant  
Setu aze vit perag on chomet den yaouank

5<sup>o</sup> C.

An dilhad deuz ar c'haera a renko da gaved  
Eur roben borded gant zeñ hag eun tog alaoured  
Hag aliez do fea renko amprest arc'hant  
Setu aze vit perag on chomet den yaouank

6<sup>o</sup> C.

Beteg ma vo bevet mat chist ha giwin da evet  
Eur zal hag eur piano eur gampr kaer da gouzket  
C'hoaz ne brizo ket memeuz skubad netad e c'hamp  
Setu aze vit perag on chomet den yaouank

7<sup>o</sup> C.

Pa c'hefet da gaozeal gant an dimezelet  
Dalc'het ho tok en ho torn ho korf hanter bleget  
Red'vo diach beza goger m'ar n'o pe ket e'hoant  
Setu aze vit perag on chomet den yaouank

Da ober o kaër otro laket eur liviten  
 Eun tog fonz kurr war o penn war ho piz eur walen  
 C'houi ra eur bern ardou fall wit plijout da Fant  
 Setu azè vit perag on chomet den yaouank

An hini zalc'h eur veri ha c'hopra eur vatez  
 Da c'horo da ribotak da gass ar zaout da voëz  
 Hag e verc'h n'an oullo ket lakat he zreid er fang  
 Setu azè vit perag on chomet den yaouank

An tad a vo er parkou dindan an oll amzer  
 Mez e dimezel yaouank chomo bepred er gaër  
 Lem ha zon ar piano d'ober ze e deuz c'hoant  
 Setu azè vit perag on chomet den yaouank

Pa ve eur pardon er vro c'ha an noz da zansal  
 Klevet e vez o c'hoarzin hag e zreid o strakal  
 Neuze ne de ket aon da lampat kreiz ar fang  
 Setu azè vite perag on chomet den yaouank

I'an arru ar verc'h er gaër an dud e ve kousket  
 An tad a unvriou stard ar vamm a vo nec'ket  
 Neuze vo klevet Janned o vont dousik de c'hampur  
 Setu azè vit perag on chomet den yaouank

13<sup>e</sup> C.

An de warlerc 'h a chomo pad an de n'e gwelê  
Gant an droug en e diouar pètramañd n'e c'hostê  
Al greiz e oa o tansal e devar bet eul lamp  
Setu aze vit perag on chomet den yaouank

14<sup>e</sup> C.

Breman e vin brudet fall gant an dimezelet  
Koulskoudê ar wirionez am eus d'e lavaret  
N'o deus nemed labourat hag ez pergn o arc'hant  
Newze vo gwelet nêbut a goz potred yaouank

Leinad